

(36 B)

ANTRETIEN ETRE DAOU ZEN YAOUANQ VAR EUR SEPARATION VOLONTER

Var eun ton nevez.

Selaouit oll, tud yaouanq, eur r̄eson familier,
A henou eur et speret izel zo o chomen Treguer,
Hac en deus ar volonte da zont da zisclérian
An tenor deus an amitie zo arruet gantān.

Crenvoc'h calz eguet ar mōr, primoc'h eguet an avel,
Brillantoc'h eguet an tān, douçoc'h eguet ar mel,
Eo chaden an amitie, pa ve parfaitsamant
Hac unisset a galon entre daou den yaouanq.

Rac se ta, goaset yaouanq pere a rēn er bed,
Ne laquit qet ho speret da re garout merc'hed ;
Rac gout ouzon ar fēcon da douch ar c'halonnou
Mui eguet an doctoret gant o oll discoursiou.

Eun tamperament douç o deveus ar merc'hed,
Gant eur galon goal frajil, eun humor imparfet ;
O bisach a zo joaüs, ho daoulagat mignon,
Me o c'halon zo traitour ebars e pep fēcon.

Me meus choazet eur vestrez, ar vrava femelen
A guement zo er c'chanton, nemet ma zeo bien ;
E merit, e zalanchou a zepant eus an eē,
Mes n'hellān mui e meuli : ar gloar zo da Zoue.

O lumier an divalijen ! da hano eo al Loar,
Te form ar blanedennou a rēn var an douar,
Hac ec'h eus va obliget dre va flaneden galet
Da isoher eur serman pehini am boa grēt.

Me a ya da ziscléria eur separation,
Goudé calz a garante etre daou güir vignon :
Ar femelen oblijet da zont da chench quartier,
Hac ar mal zoqen dalc'het na ell quet a ober.

Cetut ta ar femelen lēzet en abandon ;
Ha ramplisset e c'halon a zesolation,
E rencont n'en separi demeus e c'harante,
Model deus e flujadur, tenzor e amitie

Allas ! eme'r femelen, me a vel bremā sclèr
Ne meus qen var an douar netra ne me mizer.
Me na meus na tad na mam o rēn var an douar.
Ha muia tra am chagrin, na meus den hac âm c'har.

Oll lapousset eue an êr, canit tout assembles
Gant eur music eloquant, vit ma clévin ho mouez,
Ma ellin demeus ho pers caout consolation.
Pa zōn gant va servicher lēzet en abandon.

Sant Pêr, prīng an Ebetels ha porzier var an trône,
Disqennet em c'habinet, roit din consolation,
Pe suppluit an ancou ma teuyo qent an heur.
D'am lemel deus ar bed-mâ pa ne meus nemet maleur.

Pa voa'r femelen yaouanq en en desolation
Ec'h antren n'e c'habinet ganti e güir vignon ;
En eur dont d'e zaludi en deus bet goulendet
Petra ez eo sujet ma zeo qen contristet.

Ar plac'h

Me ren dêch eur reveranq vel eun Ael eus an eē,
E mā etro ho taouarn chaden va liberte :
Hanval ouz eur martolod trapet etre daou dour,
He ne zeus nemet Doue a ell rei dezān sicour.

Ar Goas

E pez fēcon Plac'h yaouanq, em be me an alc'hoe
A guement a ranferme chaden ho liberte ?
Rac ne ma qet em pouvoar, pa n'er meritan qet ;
Beza an dispansatour Rouanez ar merc'hed.

Ar Plac'h

Oh ! ecusit, den yaouanq, rac n'on qet eun objet
A diefe bezo hanvet Rouanes ar merc'hed ;
Evit beza caret dre eur guir amitie,
Ne deuit qet d'am godissa ha bet ouzin true.

Ar Goas

Credit hardi, Plac'h yaouanq, en ho carân parfet
Hep imblia ar flambos gant Venus alumet ;
Quent velfech ar rivierou o pignat d'o sourcen
Eguet biquen, va mestres, ac'hanoc'h na drahisen.

Ar Plac'h

Ret e zeo din finissa ha cessi barlan,
Ho comzou, va mignon quer, am tent meurbet contant :
Me deu da souheti déc'h ar boneur parfetan :
Eur pied d'am bolonte ho qaro evel ma rān.

Ar Goas

Pa rencomp n'em separi, greomp a galon vad,
Qercoulz eo ober abred evel a ziveat.
Pa n'em domp qet destinet da vez a prijou,
Chang domp ebars er bed-mâ ha goude hor maro.

Ar Plac'h

Me c'hoar ganen vel Adam barados terrestre,
Pa voe difennet ountân dibri frouez gand e Vestr,
Pa zigresq va liberte e cresq va antétamant ;
Rel eo en em separi bout bepret et contan.

Ar Goas

Felix, Hector ha Pompe, Abeillard hac Anton,
Ar patriarch Abraham hac ar fur Salomon,
En nobstant d'oll oll sqient o deus renqet finissa,
Ha ni dile beza contant d'ober ar memes tra.

Nep en deus grēt ar zon-mâ a zo c'hoas den yaouanq
Oajet a dri-uguen'mis en tu-hont da dri-c'chant
Hac en deus-hi compostet en desolation,
Touchant eo ar c'halonnou piqet gant Cupidon.